

## G U E R Z

*Var sujet Yan Guilchin, Maharit Riou, e bried,  
ha Susanna Riou, o nizez, demeus a barros  
Plouguiel, assassinet gant Yan ha Louranç  
Tregoad, deus ar memes parros.*

**M**'Ho ped a greis va c'halon, Jesus, Salver ar bed,  
Da r  i din gouir scl  rien da bos i va speret,  
Evit ni'ellin discl  eria d'ar bobl en guirione  
Ar maleur so aroet n'en deus q  et pell aboe.

En qichen Croas Kousy, evit henvel ar pla  ,  
E zeo aruet ar maleur, pehini a zo bras :  
Yan Guilchin hat e bried en azy zo lazet;  
Un nizez a voa gante, a bemzec vloas oajet.

Unan a c'houlen digor da gaout tan da fumi,  
Yan Guilchin a dal an tan a deu da zigueri :  
Allas !  n na vouie q  et, pa zigeras e zor,  
En devoa-by digoret d'e vrassa adversour.

En comp  agnunes an de en deus gouleanet digor,  
Herves a zo artuet, e voa ar malsetour  
Pehini en devoa dessign dre e dol yenjama  nt  
Da laza an tri den-m   en eur m  nies instant.

Evel ma tigor an nor d'e eneniet bras,  
Er scojont quer-maleurus ha mar e  e var ar pla  ,  
Siouas, ar paour Yan Guilechin d'an douar hep appel,  
Ha sq  i a rejont are, ma neus ranget mervel.

E bried, Maharit Riou, a dosteas deze,  
Dre gomzou carantezus e c'houlebas ouze

Ur pennadic a amzer d'en em gōnvertissa

Ous Jesus, hon Rēdemptor, qent mont eus ar bed-mā.

Ma elje n'em gōnvertissa eus a grcis e c'halon  
Ous Jesus, hor c'conductor, ha gotir Roue an Tron,  
Hac ous ar Verc'hes Vari, Rouanes an Ælez,  
Mā c'hantreo er joayou goude fin e huez.

Unan eus an tyrantet a lar d'an hini a scoe,  
Na chomje qet da zelaou ar seurt rēsoñiou-se,  
Pe e vanco an tol da obér, ha tûd a dremeno,  
A laqay hor c'hemeret, hac hör bomp ar maro.

Evel ma clévas an tyrant an den-mā o prezeg,  
He ziou vrec'h hac e vènvec e scroches en deus savet :  
Sqêy a ra qen maleurus varnei adreus he fenn,  
Ma reuq coea d'an donat ous o zreid da verval.

Cri a vije ar galon, Ha cri ma na voelje,  
A vije het o clévet ar buguel voa gante  
O c'houlen abalamour da Bassion Doue,  
Ous an tyrantet cruel huimblamant he buc.

Goul a ra ous ar Verc'hes hac ous Doue pardon  
Hac ous an dud miserabl e'houl compassion,  
Respong a rejont dezi; beza po da vue  
Qen omnip hoinp fin deus honmān e pezo a zele.

Homān co ar glac'hар, comprenit, christenien,  
E devoa ar buguel-mā c'hoas o c'hortos mervel...  
O velet lazā an daou den o veuzi en o goad,  
Hep ma contante furi an tyrantet ingrat.

Unan an dud miserabl en deus dei prononcé  
Laret hac hi-a anefoa qen ma vije scëdet :  
Ia, emei, m'ho heneo assur a dra certen;  
Mes lezit va hñe ganén, n'ho tiscuillin biçen.

Evel ma clévas an tyrant anezio lavaret  
Certen oc'b'anevezan, en deus-hv het scëdet :  
Terri ra ur vrec'h dezi, hep eaout compassion,  
Sellit furi an tyrant hac e oll ardisson.

Vel m'en deus-hi discaret e crog er forc'h houarn,  
 E sqêy var he fenn treus-tre, qen e za d'an douar;  
 An uep n'antere en o mesq al lun var ar beure,  
 O deus laret dirazón e voa gouir qementse.

Goudé coll o buez, c'hoas an tyrantet cruel  
 Evit dont d'o massacri e crogjont er scabel,  
 Da vrişa o oll mamprou, da ziguerrí o fenn :  
 Emàn eo ar maleur incroyahl, christenien.

Cetu er memes instant an tri den-nâ lazet :  
 Considerapla maleur, hep rôson na sujet !  
 N'ouffet qet disclêria brassoc'h erim na maleur,  
 Eguet a zo arruet er barros a Blouguiel.

Speret-Santel, deus an ên roit din sclêrijen  
 Da zisclêria qent finissa dirac ar gristenien  
 Piou a so qiriec d'an tri den hep sujet da vervel,  
 Penos eo recompanset an tyrantet cruel.

Disclêriomp ar recompanç o deus an enemiet  
 Demeus ar c'hrim detestabl o deus bet cometet,  
 E laza, e vassaci tri den nep sujet na rôson,  
 Receo a reont ar supliç abeus Doue guirion.

Goerc'hes glorijs Vari, Mam a gompassiou,  
 Rouanes an oll Æles, roit din an ardisson  
 Da henvel dirac ar bobl an daou den miserabl  
 A zo bet cos d'ar maleur : Yan ha Lauranç Tregoañ.

Pemzec dez int bet er guær goude grêt o dorset,  
 Gonêt e voant gant Satan har e oll gonsortet,  
 Hac a ro dé da gredi n'o dije nep scaudal  
 Evit beza cometet us c'hrisia qen disleal.

An drizcycvet a vis meurs e zint bet qemeret,  
 Ha cunduet d'ar prison eguis crimalet ;  
 Hac evel mac'h antrejont d'eo e voe presantet  
 An armou maleurus-mân pere ameus hanvet.

Goulennet e voe oute hac int o anafoa ;  
 Hoc'h aciessti teir guech na respontont netra.

Jesus-Christ, hon Mestr divin, cablus en o lege,  
Qen na ellent qet prezeg a esep gairione.

Deiz marc'hat a Landreguer e zint bet partiet,  
Conduet da Lannion eguis crimalet :  
Hac o armou maleurus aroc d'eo pen-da-ben,  
Ma crie an dud venjanç, o tonet da gompron.

Pa antrejont er prison'e voent interrojet :  
Laret d'eo e vurmure o farros a enep ;  
Cablus en em leqeent pa discuet diraze  
An armou maleurus-màn e voant bet crog enne.  
Condaonet voent da zouguen an daou venvec croel  
Teir guech aben tri marc'hat d'ober an dro da guær,  
O sonjal ober dezo en em gconvertissa,  
Ha dont d'ansavi ar c'hrim e voant qiriec dezàu.

An aerouant furius a voa en o c'hichen,  
Hac a r  d'eo da gredi e voant prest da verval ;  
En instant ha ma sonjent e vijent punisset,  
Hac o tevel var ar c'hrim n'o dije drong abel.

A Lannion da Voengamp e zint bet conduit,  
Garottet gant ur chaden cri ha digar meurbet ;  
Ha deus an eil q r d'eben, hete fin o bue ,  
Evit henvel ar recompa q preparet evite.

An deirvet nos m'o devoa en Goengamp da possi ,  
Ober a rejont concour oa c'hout penos deserti :  
Ma c'hallempr caout hon lanc, emezc, da dec'hez,  
Ec'h astens hor bue , ne ranq mp q t c'hoas mervel.

Dre ur prenest e c'hejont en avis deserti ;  
Prest e voent appercevet, ha ma savas ar c'hri :  
Ar jolier, an archerrien o deus o arr t t ,  
Ha lajet en ur c'hachot , hac o daou houarnet.

A Voengamp da Sant-Brieuc e rancjont partia,  
Elec'h m'o deus recevet o setan q diveza :  
Unan an  so marvet , hac eguile so het  
Tri mis anter var e lere's bep beza distrujet.

Abee ar c'hoezecvet de deus a vis guengolo,  
 Herves a incus ententet, e zeo laqet d'ar ~~malo~~  
 Goerc'hes gloriis Vari, hon gouri avocades,  
 Procurit dirac ho Mah evit ur pec'her ques.

Pa deuas deus ar prison da vonet da vèrvel,  
 E voe gouennet outan gant e goadquerien.  
 Qent ma vije delivret hac én disculje den :  
 Netra n'en deus respontet, nemet plega e benn.

Pa voe éru var ar chaffot en e za è savet ;  
 Truezus bras ous an ên en dcveus het sellet :  
 Juntri a eurc e zaouarn ha plega varneze,  
 D'ar chaffot evit renta da Zouq e ene.

Jesus-Christ, me a c'houlen m'o devo recôpanç  
 Goude ober pinijeu en ên rejoissanc i  
 Jesus, Salver adorabl, bezit truez oute,  
 Ha placit-int, me ho ped, o semp en gloar an êu.

Esperi a ràn o dcus grêt calz, deus a binijen :  
 Jesus, consolit qement en deus goeil blaneden ;  
 Me a réqe m'o devo bet a greis va c'halon  
 Digant Doue gent mervel ur gouri gонtrition.

Ha m'o devo bet ar grâc d'en em humilia  
 Demeus a greis o c'halon qent mont ous ar bed-mân ,  
 Ous Jesus-Christ, hon Zalver, ous hor vain ar Verc'hes;  
 Grâc d'eo da veza en heat eus o zilvidiguez.

Selaouit, eos ha yaouanq, ha grit reflexion  
 Var ar maleur-mân a dle aatren en ho calon :  
 En delivranç d'o-ene leroamp un *De profundis*,  
 Ma plijo gant va Jesus heza ôute truezus.

An nep a sell dezàn gout petra so qiriec  
 D'ar maleur epouvantabl en Priel arruet,  
 Abalamour d'eur pez douar a yê en ferm gante  
 En deus grêt an dud maleurus dezi coll e bue.

Gouennenomp digant Doue goude fin hor bue  
 Ar c'hraq d'en em aigavezout en joaustet au éa,

Evit ma c'helfomp assambles meuli hor gouir Autrou ,  
Cana er gloai canticou caer ha meulodiou.

Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Æle ,  
En henor d'hor c'houductor Jesus gonir Vab Doue ,  
Ha d'ar Verc'hes gloriis , pini so deiz ha nos  
Oc'h intercedi evidomp ebars er barados.



## C A N T I C

EN HENOR

D'AN ITRON VARIA A VOUIR-SICOUR ,

DEUS AR GUÆER A VOENGAMP .

Var ton nevez *Santez Anna ar Palud.*

**D**I VAR pennou va daoulin mé e ya da c'houlen  
Digant ar Speret-Santel deus an ên sclérigen  
De gomposi ur C'hantic herves ma santimant ,  
En enor an Itron Varia Gouir-Sicour a Voengamp .

Me ho ped , pelerinet a bêvar c'horn ar vro ,  
A Dreguer hac a Leon , a Voenet , a Guérneo ,  
Dent oll a greis ho calon da gaout ho Manti saintel ,  
A réleo ar pouvoariou a zaouarn hor Salver .

Ne zeus plac e Breis-Isel d'ar Verc'hes batisset  
Hac a ve darempredet gant ar belerinet ,  
Evel an Itron Varia a Gouir-Sicour a Voengamp ,  
Ar brillanta stereden a so er firmamant .

Beza e deus ar pouvoar digant Salver ar bed  
Da rîe ar soulajamant d'an oll dud afflijet ,  
Qement en' em' addresso dezi a vouir galon  
E laqay fin d'o zoûrmant ha d'o affliction .

Conrach deoimp, oll christenien, evit mont e bete  
Da renta dëi ar visit gant gonir humilite;  
Hi so hor Mam a drues hac a ro ar pardon  
D'an nep a deu d'er goulen eus a greis e galon.

Réi a ra ar sclérijen d'ar re a so privet,  
Ar c'hlêved d'ar re bousard, d'ar re gam ar c'herzet;  
Yec'het d'an dud langnissant, d'ar re vud ar parlant,  
Da guement a so afflijet e ro soulajamant.

Itron Varia Vouir-sicour, dëc'h en em adressan ;  
Roit d'am speret al lumier da ellout disolêria  
Ar poent ma mân ar Pardon hac an iñduljançou  
Ebars an ilis sântel da guement e fedo.

Ar savanta den so het nac a vezò biqen,  
N'eo qet evit lavaret na genebeut compren  
An nombr eus ar miraclon a rá hor Mam sântel ;  
Sonten an oll hec'herien er bed universel.

Tostait, asistantet a hep condition,  
Cetu amâ ar poënt blos ma medi ar Pardon :  
Ar Sul qenta a viscoas demeus a vis Guefen  
E mân an iñduljançou evit ar hec'herien.

An nep a govessayô hac a goimunio  
Epad ar solemnite certén a c'Honeo  
Pemp cant devez a bardon hac ar boneur ouspen ;  
Ar joayon da jouissa goude o finigen.

Pedennou, sacrificiou evit an anaon  
A bad pêvar mis amzer goude deiz ar Pardon :  
Dirac an Itron Varia Vouir-Sicour beniguet,  
Baqêt a greis o c'halon gant ar helerinet.

Goerc'hes glorijs Vari, hor Mam hac hon Itron,  
Obtenet, me ho suppli, ho penediction  
Var an oll helerinet a deu da visita  
Ar plac sântel ha da réi o offrançou enna.

Habitantet a Voengamp, a dro var dro dezi,  
Eurus eo an douar ma jouissit enna ;

Ganâc'h emâ an tenzor ar c'haera so er bed  
An Itron Varia a Vouir-Sicour, Mam ar heterinet.

Me a ya, qent finissa , var bennou va daoulin  
Da saludi ar Verc'hes, Mani sañtel ha divin,  
D'en em reconcilia ha da c'houlea pardon,  
Qent evit dispartia deus an tenzor guirion.

Pardon, Itron Varia Vouir-Sicour biniguetz  
Grit deomp ober pinijen da baea hon pec'het,  
Evit, goude hor maro , ma momp-ni ar boneur  
Da jouissa assambles er joayou eternel.

Goerc'hes gloriis Vari , hor gouir Avocades,  
Procurit dirac ho Mab evit ar pec'her qes,  
O goulen a vouir galon pardou digant Doue,  
Da c'hortos en em velet e joaustet an ên,

Ar pempet deiz varnuquent demeus a vis c'hoevrer,  
Er bloas mil ejz cant penizec , evit expliga sclér,  
Dirac ar bobl en antier e zeo het compost  
Ar C'hantig spirituel d'ar Verc'hes biniguet.

En hano an Tad , ar Mab, hac ar Speret-Santel,  
Tri ferson deus an Druidet a reno etornel,  
Bet truezeus va epe , e zau da finissa :  
Grac deomp oll d'en em velet e traounyen Jesapha.

**FIN.**

E-Montreal: eus a Imprimerie LEBLANC.